

D'an 9 a viz Du

- D'an deiz-mañ e lider Dedi Iliz Sant-Yann Laterano a zo iliz-veur Roma, ha neuze mamm ha penn holl ilizoù ar bed kristen. Savet e voe gant an impalaer Kustentin e deroù ar pevare kantved e-kichen Palez tiegezh kozh al Laterianed ha gouestlet d'ar C'hrist Salver. Pemp Senez Hollilizek zo bet dalc'het eno.
- Er bloaz 89, merzherenti sant Klemes. Koñsul e oa Titus Flavius Clemens, eus tiegezh an impalaer Vespasianus. Er C'hornog e kreder e oa eotr Flavia Domitilla, keniterv an impalaer Domitianus, diouzh hengoun ar Reter e vefe e wreg. Pa zeskas an impaler e oa deuet Klemes da vezañ kristen en e lakaas da vezañ lazhet hag e forbannas Flavia da enezenn Pantelleria.
- War-dro 304, en Amasia en Hellespont, merzherenti sant Teodor Amasea, megalomartyr eleze "merzher-meur". Enrollad e oa da vare Maximianus pa voe gwallgaset en abeg d'e feiz, karc'hariet ha taolet en tan. Meulet eo bet gant sant Gregor Nisa. Skeudennaouet e vez o trec'hiñ war un aerouant diouzh danevell e Vita. Lidet eo da zeiz dedi an iliz gouestlet dezhañ e Roma ouzh troad ar Palatin. Kehelet-meurbet e voe en Euchaïta a vire e relegoù hag en holl ilizoù ar Reter.
- Er IVre kantved, ganedigezh en neñvoù sant Matelin (Lt. Maturinus, Gl. Mathurin), abostolour ar Pagus Vastinensis eleze ar Gâtinais e Bro-C'Hall. Bezet e Larchant e vez kehelet kenañ e Breizh. Hag eñ un denjentil galian-roman en em droas ouzh Doue gant e holl diegezh. Mab speredel sant Polykarp e voe beleget hag e krogas da aviañ. Ken brudet e oa e santelezh ma voe galvet da Roma gant an impalaer Maksimian, war-dro 310, evit pareañ e verc'h-gaer Teodora a oa klañv he spered. Sant Matelin a zaskoras yec'hed homañ, ar-raok ma a timezfe diwezhatoc'h gant Constantius Chlor, tad Kustentin a voe an impalaer kristen kentañ.
- War-dro 525, sant Van (Gl. Vanne), eskob Verdun. E Bro-Loren e voe roet da bareon d'un abati bras a zeuas da vezañ kreizenn kongregadur beneadat Sant-Van.
- En Xvet kantved, sant Simeon ar Metafrast, sentbuhezour bizantat. Kuzulier lerc'h-ouzh-lerc'h eus tri impalaer e ouezas nevidañ ent-ampart gant an alouberion arab e Kretoz. En em dennañ a reas avat eus e gargoù uhel evit en em ouestlañ da zastum danevelloù buhezhoù ar sent, oberennoù sant Bazil ha sant Maker ha da sevel un hanezadur hollvedel eus an Iliz.
- E 1906 e Dijon, distro da Zoue santez Elizabed an Dreinded, karmezadez. Ganet eo Elisabeth Catez en un tiegezh a orin eus ar Berry hag e vevas bepred e Dijon lec'h ma oa bet kaset gwarnizon he zad soudard. Hemañ a varvas pa ne oa hi nemet seizh bloaz. Dezhi ur spered lemm, e oa birvidik ha troet da gounnariñ, hogen e vennas kemm gant skoazell he mamm a-benn trec'hiñ war he zemz-spered diaes. Gonezet ganti priz kentañ ar piano er skol-sonerezh, prizet e kevredigezh vat ar gêr, e oa ur plac'h goant klasket evit dimeziñ pa zivizas mont d'ar c'harmez. Eno, e anavezas pemp bloavezh a unanidigezh gant Doue, leun a levez hag a hez santel daoust d'ar c'hleñved he zumpas d'he c'hwec'h bloaz war'n ugent. Lezet he deus skridoù o reiñ un tañva d'he buhez kevrennel o vont-tre e buhez an Dreinded Santel.
- En Iwerzhon, war-dro 474, sant Benan (Iw. Benén ; Lt. Benignus), eskob, diskibl ha lerc'hiader sant Padrig. Mab un tiern bet kanttroet gant sant Padrig e voe eñ keneil feal e labour a abostol. Gounit a reas d'ar feiz Iwerzhoniz kontelezhioù Chláir, Chiarraí ha Connaugh. Anvet e voe superior abati Drumlease bet diazezet gant sant Padrig ma voe e warlerc'hier en Ard Macha.
- En Iwerzhon, santez Sarnata, maouez santel a savas un iliz e Gaillimh.
- War-dro 510, sant Pabo, abad. Hag eñ mab un tiern eus harzoù Saoz-Breizh en hanternoz an enezenn, e savas ur manati e Llambado en enez Von.

D'an 10 a viz Du

- War-dro 251, e Bitinia, merzherenti ar sent Trifon ha Respitius. Genidik eus Lampsakos e Frijia, e voent desavet er feiz kristen. Harzet dre ma oant kristenion e voent kaset da Nikaia dirak Aquilinus gouarnour Bitinia o lakaas da vezañ jahinet kriz hag en diwezh dibennet. Emañ o c'horfoù en Iliz ar Spered-Santel e Roma war-un dro gant hini santez Ninfa a voe merzheriet ivez ganto, a greder, hag a zo unan eus peder fatromez Palermo gant santez Agata, santez Kristina ha santez Olivia.

- E 461, e Roma, ganedigezh en neñvoù sant Leoñs Veur, pab, doazhour eus an Iliz. P'en em vodas ar pevare Senez Hollilizek e Kalkedonia e kasas sant Leon ul lizher o tiskouez ennañ ar gelen-nadurezh katolik war an daou natur en eil ferson eus an Dreinded, ar C'Hrist. Tadoù ar senez a embannas a-unvouezh: «Setu feiz an Ebestel: evel-se en deus komzet Pêr dre Leon.» E Roma e voe ur pastor evezhiek ouzh deskoniadur e fideled, hag ec'h enebas ouzh ar varbared a argase ar gêr beurbadel.
- Etre 627 ha 631, sant Just Kêrgent, eskob kentañ Rochester ha trede eskob-meur Bro-Saoz. Hag eñ genidik eus Bro-Italia e voe kaset war-un-dro gant menec'h all gant ar pab sant Gregor Veur war c'houlenñ sant Eosten.
- E 1608, distro da Zoue sant Andrev Avellin, beleg eus Kongregadur ar Gloer Reoliek pe Teatined. Brudet evit e santelezh hag evit e c'hred da glask silvidigezh e nesañ, e reas ar ouestl da vont bemdez war-raok er vertuz ha karget a zellidoù e varvas e troad an aoter o tibunañ an Introibo.
- E Breizh e 735, sant Gouvrian pe Gouvri, eskob Gwened e 700; da gentañ manac'h e Rewiz, marvet penitiour e Sant-Servan-an-Ould, war wrimenn eskobiezh Gwened, lec'h m'emañ e vez a zedennas kalz a birc'hirined.
- Er Vvet kantved, sant Kadwalaer, manac'h, diskibl sant Kado.
- Er VIvet kantved, sant Elaezh (Kb. Elaeth), manac'h. Tiern e oa e Bro-Saoz pa rankas tec'hout rak ar bPikted e kreiztez Kembre. Neuze ez eas da vanac'h e manati sant Seriel (Seiriol) e Penmon en enez Von. Lezet en deus barzhonegoù.
- Er VIvet kantved, sant Aod (Aedth pe Aedsin) Mac Brice, eskob en Iwerzhon. Diskibl sant Illadan e voe eskob e rannvro Tulach Mhór.
- En Iwerzhon sant Laoghaire (Louar), manac'h.

D'an 11 a viz Du

- E 397, ganedigezh en neñvoù sant Varzhin an Trugareg, diskibl sant Hiler Piktavis (Poatchie), diazeour abati Liguje, eskob Teurng, feizvonnour. Ganet er bloaz 316 e rannvro Pannonia, hiziv en Hungaria, e oa ur soudard anezhañ pa voe gounezet d'ar feiz. Hervez hengounioù Kembre, e vefe breur santez Koñseza, mamm sant Padrig, mamm santez Darerc'ha, gwreg Konan Meriadeg, ha c'hoazh mamm santez Tigrid, gwreg ar roue Grallon.
- War-dro 698, sant Berthuin, abad hag eskob. Ganet en un tiegezh brientinion eus Breizh-Veur, e voe desavet gant menec'h Otbell hag ez eas da vanac'h eñ e-unan. War gemenn un ael e treuzas ar mor gant un nebeut keneiled hag e reas e annez Bro-Wallonia, war ribl ar Sambr, e koad Marlagne, ma skarzhas dioutañ speredoù drouk. Eno e tiazegas abati Malonne.
- E 826, sant Toedor ar Studier, abad ha feizvonnour. Abad manati Stoudion e Kêrgustentin e voe harluet teir gwezh da-geñver an heskinadurioù ikonoklast. Skrivet en deus Ensavadurioù ar gelen-nadurezh kristen.
- War Enezenn-Vreizh, er Vvet kantved, sant Kevran (Kb. Cynfran), mab Brec'han, a savas un iliz e bro gCaernarfon e Bro-Gembre.
- Er Vvet kantved, en Iwerzhon, sant Yarlad (Iw. Iarfhlaith), manac'h e Ard Macha.
- En Iwerzhon, er VIIvet kantved, sant Kommin (Iw. Cuimin), a savas un iliz e Cill Chuimín.

D'an 12 a viz Du

- Er Vvet kantved, ganedigezh en neñvoù sant Nil, abad. Diskibl sant Yann Grizostomos e oa prefed Kêrgustentin. Dimezet gant ur vaouez deol en em dennas ganti d'ar gouelec'h evit ren ar vuhez penitiour, e-kichen Menez Sinai. Eno e skrivas oberennoù speredel en o zouez Prederouriezh ar Spered Santel.
- E 656, e Kerson e Krimea, merzherenti sant Varzhin I añ, pab. Dre ma kondaonas dre ur senez bodet el Laterano disivoud dalc'hidi an unvennantez er C'Hrist e voe skrapet gant an eksarc'h Kalliope ha kaset da gKêrgustentin ha da c'houde e Krimea lec'h ma varvas. Harpañ a reas sant Amand p'edo e reizhañ kloer eskobiezh Maastricht.

- E 1623, e Vitebsk e Bielorusia, merzherenti sant Yozafad, eskob Polotsk e Lituania. Ganet er reizhvriegerzh e teuas d'ar feiz katolik en Iliz ruteniat unvan. Bez' e voe neveziad kentañ manati an Dreinded Santel e Kêr-Vilnius e lec'h ma voe anvet da Higoumen pe abad anezhañ. Diuzet da vezañ arc'heskob Polotsk e labouras dizehan da unvanidigezh an Ilizoù betek bezañ lazhet en abeg d'e fealded ouzh Sez Abostolek Roma.
- E 1103, e Kazimierz nepell diouzh Gniezno e Polonia, ar sent Benead Benevento, Yann, Izaag, Mazhev ha Kristian. An daou gentañ a oa Italianed hag an tri all Poloniz. Bez' e oant menec'h gamaldul, keneiled sant Adalberzh Praga, deuet da avielañ ar Slaved. Lazhet e voent p'edont o lidañ gwaznezh Doue.
- E 1463, e Segovia, sant Diégo pe Didas, breur minor. En e garg a liorzhour, a borzhier, a geginer ha dreist-holl a glañvdiour en inizi Canarias, e Roma en iliz Ara Caeli, e Sevilla hag en Alcala, lec'h ma varvas, e tiskouezas kalz a uvelled hag a garitez. Brudet e voe evit e vurzhudoù da-geñver un darreuziad e Roma pa chome dihesk e orselloù liaoù a baree ganto ar glañvourion war o zremenvan.
- E Breizh, er IVre kantved, santez Koñsez (Lt Concessa, Gl. Conchesse), rouanez. Hag hi merc'h Oemutius e voe ganet e Breizh-Veur ; c'hoar sant Varzhin e oa. Dimeziñ a reas gant Calpurnius hag e c'hanas sant Padrig, abostol Iwerzhon, santez Tirid hag a zimezas gant ar roue Grallon, santez Darerc'ha hag a zimezas gant Konan Meriadeg, santez Cinnenum, santez Lupita, santez Culmana, ha sant Sannam. Mervel a reas war un dro gant he gwaz, lazhet gant preizhataerion en Aled.
- E dibenn ar VIvet kantved, e hanternoz enezenn ar Vretoned (hiziv Bro-Skos), sant Mac'har pe Mochumna, eskob Aberdin. Hag eñ un Iwerzhonad anezhañ e voe badezet gant sant Kolman, diskibl sant Padrig. Deuet da vezañ diskibl sant Koulmkell Iona e voe kaset gantañ da avielañ ar Bikted.
- E 657, e Ghent (Gand), merzherenti sant Leuñvin (Iw. Laimhin pe Molioba, Lt. Livinius), abos-tolour Flandrez ha Brabant.
- E 1477, ganedigezh en neñvoù ar gwenvidig Pierre du Chaffaut, eskob Naoned. Hag eñ kanounour desket e voe dilennet eskob Naoned e 1477. Touiñ a reas fealded d'an dug Frañsez II pezh a oa bet nac'het gant e zaou diagentour. Brudet evit e furnezh, e santelezh, hag e garitez e voe kehelet gant ar bobl goude e varv hag e c'hoarvezas burzhudoù war e vez. E-barzh Eurioù moulet e Naoned e 1517 e kaver ur bedenn en e enor.

D'an 13 a viz Du

- Er Iañ kantved, ganedigezh en neñvoù sant Drenwal (Lt. Drennalus), diskibl sant Jozef Arimatea en Avallon, abostolour en Arvorig, eskob diazezour ar Gozh-Geoded e Bro-Dreger.
- E 437, en Afrika an hanternoz, merzherenti ar sent Arcadius, Probus, Paschasius, Eutychianus ha Paulillius, genidik a Vro-Spagn. Da vare heskinadeg Genserig, roue ar Vandaled, e voent harzet ha jahinet kriz dre ma nac'hjont entuañ gant disivoud Arius. Paulillius hag eñ ur bugel c'hoazh, breur bihan Paschasius, Eutychianus a voe bazhataet kriz ha dre ma ne blege ket da zilezel e feiz katolik e voe droukroet da c'hoariell oadourion orgedus a-raok e lazhañ.
- War-dro 444, ganedigezh en neñvoù sant Brizh, eskob, diskibl ha warlerc'hier sant Varzhin war sez Turoni hiziv Teurgn. Falstamallet e rankas lezel e sez hogen e voe kantreizhet a-raok e varv.
- E 867, e Roma, distro da Zoue sant Nikolaz I añ, pab. Dezhañ ur bersonelezh skedus, e ouezas diwall frankiz an Iliz dirak an daou impalaer a rene d'ar c'houlz-se: Mikael er Reter, ha Loter er C'Hornôg. Kas a reas sant Ansgar e Skandinavia daved Daniz Svedeniz ha misionerion all daved Bulgaria.- E 1004, sant Abbon, abad. Ganet war-dro 940 e rannvro Orleañs en un tiegezh izelek e reas e studioù e Fleury, e Pariz hag e Reims. Deuet da vezañ manac'h e Fleury e voe dilennet abad. Eno e tegemeras sant Felis hag en e stummas kent dezhañ mont da adsevel abati Rewiz. E-pad m'edo o weladenniñ manati ar Reol e Gaskogn e voe lazhet gant menec'h dispac'het a-enep dezhañ.
- E Breizh, er VIIvet kantved, sant Keferian pe Kiforian, eskob en Aled.
- Er VIvet kantved, e hanternoz enez Vreizh, er Gaeltacht (lec'h m'o doa en em staliet Iwerzhoned), sant Denig (Denick pe Teavneck, Gl Devinice), eskob. Bet ganet di, e kenlabouras gant sant Koulmkell ha sant Mac'har.

- Er VIIvet kantved, e Kernev-Veur, merzherenti santez Koulm, gwerc'hez.
- Er VIIvet kantved, sant Gredifael, keneil sant Padarn e Llanbadarn. Da c'houde e voe diazeour manati Hendy-gwyn e Kembre.
- Er VIIvet kantved, sant Caillin, eskob Fhearna (Ferns) en Iwerzhon. Da gentañ manac'h en abati Iona e hanternoz enez Vreizh, e heulias sant Aezan pa ziazezas Lindisfarn. Kemmet en dije lod druized e peulvanoù.
- Er VIIvet kantved, sant Killian, Iwerzhonad, penitiour e Breuil e-kichen Arras e Bro-C'Hall. Keneil sant Fiakr, e voent degemeret o-daou gant sant Faron e Melda.

D'ar 14 a viz Du

- E 1240, en Aljer, merzherenti sant Serapian. Bez' e voe al lean kentañ eus Urzh Itron-Varia an Drugarez o c'hounid kurunenn ar verzherion evit dieubiñ ar vac'hidi hag embann ar feiz kristen war zouar a Islam.
- E 1360, sant Gregor Palamas, eskob. Da gentañ manac'h war Menez-Athos, e pleustras pedenn ar galon hag e tiorreas kelennadurezh an hesychia eleze ar peoc'h diabarzh gant Doue. Daoust d'an eneberezh e voe diuzet arc'heskob Tesalonike hag en devoe kalz levezon war Iliz e amzer.
- E 1861, en Annam er Vietnam, merzherenti sant Etienne Cuénot, eskob. Ganet e *Bélieu* e Burgondia, e oa beleg eus Misionoù Diavaez Pariz.
- E Breizh, war-dro 505, sant Amand, eskob Roazhon a-raok sant Maelan, mignon ar barzh bugulel Severus Sanctus Endelechius ha mignon ivez sant Paolin Nola a rae anezhañ "mab ar bennozh". Da-geñver e eskobelezh e vleunias ar feiz hag an deoliezh er vro. Eñ eo a ezholas sant Maelan evit bezañ e warlerc'hier.
- Er VIvet kantved, sant Devrig (Lt. Dubricius), eskob kentañ Llandaf. Sevel a reas manatioù Henllann ha Moccas, belegiñ a reas sant Samzun hag ez eas da benitiour war enez Enlli.
- Koun eus diskibled sant Devrig : sant Uvellev, e lerc'hiader war sez Llandaff, sant Arouestl, sant Aezan, ha sant Gourvan, voe ivez eskobion Llandaff, sant Kinwall pe Kenwall, abad Lann Cinwalan e Gouer e Bro-Gembre, sant Elhouarn, mab Kervael, sant Yuznou, abad, sant Gourzeg, abad, hag ar sent Arzhvod, Elored, Gunnev, Merc'hwen, Kongur, Yunabou, Konvran, Gournavou, Yaouan, Kenvarc'h, Gourvaed, Toulideg, Kennour, ha Tevei a voe menec'h an holl anezho.
- Er VIIIvet kantved sant Modanig, eskob e hanternoz enez Vreizh. Kehelet e Aberdin hag e Philorth (Fraserburgh).
- E 1180 sant Lorgan (pe Lorc'han, Gw. Lorcán Uí Tuatail, Gl. Laurent de Dublin) pe Laorañs O'Tool, e Eu e Normandia, abad Glean Dá Loch - o talvezout *Glenn an Div Loc'h* - arc'heskob Dulenn. Hag eñ kenderv roue Leinster ha kannad ar Pab en Iwerzhon e tifennas gant nerzh kenurzh an Iliz da-geñver degouezhioù diaes e amzer hag e strivas da adsevel ar peoc'h etre ar briñsed. Eñ e unan a c'honezas ar peoc'h peurbadel p'edo o vont da gas da benn ur gefridi evit ar peoc'h da gichen roue Bro-Saoz Herri II.
- E 1974, e Bezhon e-kichen Roazhon, ar bac'hiadez Léontine Dolivet. Kristenez er bed, e ouestlas he buhez da gatekizañ ar vugale. He breud gwenvidikadur a zo bet digoret gant eskobiezh Roazhon e 2017.

D'ar 15 a viz Du

- E 1136, e Klosterneubourg, ganedigezh en neñvoù sant Leopold, markgraf, eleze gouarnour bevenn-difenn Aostria, lesanvet an « hini deol », den a beoc'h, mignon ar beorion ha gwarezour an ilizoù. Kar da Frederig Rouz-e-varv (Barbarossa) e ouarnas e vro gant furnez hag e reas eus e balez un herberc'hti evit ar beorion hag en emzivad. Lakaat a reas da zont ar venec'h gisterkiat hag e tiazezas abati Mariazell. Bez' ez eo patrom pennañ Aostria.
- E 1280 e Kolun, distro da Zoue sant Alberzh Veur, dominigad, eskob Regensburg e Bro-Vayern, Doazhour eus an Iliz. Genidik a vro Bayern ez eas en Urzh ar Vreudeur Brezegennerion hag e kelennas e Kolun, e Pariz hag en Italia. sant Tomaz Akwino a voe unan eus e studierion. Gant e

labourioù heverk war ar skiantoù hag ar brederouriezh e tiskouezas e klot ar feiz gant ar poell, o tont o-daou eus an hevelep Doue, mammenn unel an antur hag ar c'hras.

- E Bro-Santon (*Saintonge*), war-dro ar bloaz 620, sant Maloù, abad-eskob kentañ manati enez Aaron (e-tal Aled), da gentañ diskibl sant Brendan e Nantcarfan e mervent enez Vreizh, marvet en harlu. Emañ e-touez ar Seizh Sant kehelet gant an Dro-Vreizh.

- War-dro 689 e-kichen Rozon (*Rouen*), sant Siadhan, (Lt. Sidonius, Gl. Sidoine pe Saëns, Sanse), abad. Skrapet e oa bet gant morlaeron en e vro c'henidik Iwerzhon pe Skos ha gwerzhet evel sklav da venec'h Jumièges a yae da brenañ ar gemeridi e porzhioù Bro-Saoz evit o dieubiñ. Dibab a reas ar vuhez manac'h eno ha da c'houde en enezenn Herio (Noirmoutier) da vare sant Filberzh. Da c'houde e savas ur manati e Caut, bremañ Saint-Saëns.

- E 879, e Rheinau en Helvetia, sant Fionntan, penitiour. Genidik eus Bro-Iwerzhon ez eas da birc'hirinañ evit ar C'Hrist betek Teurn, war vez sant Varzhin, ha betek Roma a-raok mont da vanac'h hag echuiñ e vuhez evel penitiour.

- E 1904, e San Remo e Liguria, ar wenvidigez Mamm Mari ar Basion, ganet Elena (Hélène) Chappotin de Neuville, , leanez. Ganet e Naoned e voe diazevourez Frañsezadezed Misionerezed an Itron Varia e Ploufragan e-kichen Sant-Brieg.

